

EBREL 1982



AL
ANV 14

9 LUR

PENNAD STUR

An Aotrou Couban, rener FR3 Roazhon a ra goap eus ar Vreizhiz.

Pa vez kel a ledannat plas ar brezhoneg er skinwel hag er skingomz e tiviz e-unan-penn lemel kuit abadenn geleier 12 eur 20 / 12 eur 30 war gwagennoù-etre radio Brest evit lakaat en he flas un abadenn a geleier evit familhoù an dud a vor. N'eus ket a blasoù all evit lakaat an abadenn-se, anat deoc'h ! Goap a ra eus dileuridi sevenadurel Vreizh pa n'en deus rannet grik eus kement-se dirak ar c'huzul sevenadurel d'an 19 a viz Meurzh goude bezañ kemeret e ziviz koulskoude.

Klemm a ra diouzhtu Skol an Emsav, Emgleo Breizh (trugarez dezhañ evit e lizher kelaouañ) ha strolladoù all eus FR3 Roazhon, kas a rae kalz a dud o zamm lizher da rener FR3. A-benn ar fin e tivize an Aotrou Couban cheñch e venoz hag adlakaat an abadenn evel a-raok.

Pebezh klufanerezh vil eo hini ar Jakobined vrein a ren warnomp ! Bezit asur e vo atav kavet ur c'hargad bennak da skoazellañ an divizoù a-du gant ar brezhonegda vont buanoc'h war-raok... N'eo ket war zigarez m'en deus lavaret pennrener abadennoù FR3, Guy Thomas, da renerien rannvroel FR3 ledanaat plas ar yezhoù minorezel ma vo gwellaet an traoù. Ne zeuio ket an disterañ cheñch-amanant a-bouez hep ur stourm kalet ouzh ar gouarnamant gall ha sokialour e vefe... P'emeur o kempenn deomp ur statud nevez evit ar selled ha klevad e vefe mat d'ar stourmerien prederiañ war ar palioù da reiñ d'o stourm.

N'eo ket gouenn un toullad minut-ennou ouzhpenn, un abadennig ouzhpenn, mar plij republik karet, a zo d'ober. Nann, ret eo deomp stourm evit ur cheñch-skinnel, ur radio hollvrezhonek, renet gant servijoù emren ha demokra- tei, enno brezhonegerien hepken ha di- stag-kaer ouzh ar re c'hallek. Ezhomm vo tud, ezhomm vo strivoù, n'eus ket nebeutoc'h avat evit tizhout bevañ giz brezhonegerien er bed a hiziv.

TAOLENN AL LANV14

| | | |
|------|----------------------------|-------------------------|
| P.3 | EUSKADI | Martial Menard |
| P.7 | KEMBRE | John Idris |
| P.11 | IWERZHON | Eamon O'Ciosain |
| P.17 | BREIZH | J-Charlez Grall |
| P.19 | DIWAN | |
| P.20 | CAPEZ | Divy Kervella |
| P.22 | LEVRIOU | Martial Menard Riwal |
| P.25 | SONEREZH | Herle Denez |
| P.27 | LABOUSED | Tudu |
| P.28 | FR3 | D. An Doujet |
| P.29 | GERIOU-KROAZ | Job |
| P.30 | KEMENNOU | |
| P.32 | AR STROLLADOU POLITIKEL | Kargedoull |

Ar bed Keltiek

LEVRIOU
FLADENNOU
RENER : GWELTAZ AR FUR
2, str. ar Roue Gralon
29000 KEMPER. 95.42.82

AL LANV CPPAP 62602 ISSN 0246-5396
Kelaouenn diskleriet hervez lezenn.
Rener : Patrig an HABASK
Ti-moulañ : Bretagne-Atelier, Roazhon
AL LANV, 8 str. ENEZ VAZ, AR BRADENN
29000 KEMPER. EBREL 1982
Koumanantoù : 50 pe 80 lur

EUSKADI

KELEIER A VRO - EUSKADI a-zivout
SEASKA, skolioù euskareg

Baiona. 27 a viz C'hwevrer. Etre pevar ha pemp mil a dud o tibunañ a-hed straedoù kêr, dindan ar glav-pil-polos, o teurel gant ar sailh. Bro-Euskadi an Hanternoz, daou c'hant hanter kant mil a dud d'an hirañ. SEASKA, kavell, anv- arouez ar skolioù euskareg. Ur galv ganto ha setu engroezioù war ar straedoù Berzh ha deltu. Breizh, tri milion hanter a dud o chom enni. DIWAN, anv- arouez ar skolioù brezhoneg. Tu 'zo huñvreal bepred... Pa rafe ur vanifesta- deg kement a verz e Breizh e c'hellfed bezañ engortoz a welout un tri ugent mil bennak a dud o tibunañ war ar straedoù diwar ur galv gant DIWAN ivez...

Kent gervel an dud war o sikour avat, ha bodañ kemend-all anezho, o deus skol- ioù SEASKA kaset meur a stourmad en-dro ha neuze kizidikaet an dud d'o c'hudenn- où. Sed abeg pennañ berzh o manifesta- deg :

- 1/ - Ingalet o deus gouennacuegoù da vezañ sinet ha pelloc'h e tieont bezañ dastumet war-dro dek pe daou- zek mil sinadur. N'eo ket torret al lañs-se c'hoazh.
- 2/ - Lakaat o deus kas pellskridoù a-vern da SAVARY ha d'ar rektor. Kement ha kaout un emvel ganto e sell da vezañ

enframmet en deskadurezh-stad.

- 3/ - Kaset o deus teulidoù diwar-bouez SEASKA d'an tiez-kêr ha goulnnet ganto skrivañ da SAVARY. 20 kuzul- kêr a zo savet a-du gant o goulnn diwar 21 m'int bet o welout.
- 4/ - D'ar 5 a viz C'hwevrer da 10 eur 1/2 o deus aloubet ensellerezh al labour, e Baiona, evit goulnn e vefe roet dezho pevarzek "emplois d'initiative locale". War ar memes eur ec'h aloube ur strollad all anezho en- sellerezh an deskadurezh evit goul- enn startoc'h bezañ enframmet. War ziv ezh an devezh, nevezenti ebet. Da ziv eur beure en ea strink en div ensellerezh ur bagad C.R.Sed fidel ha neuze, skarz de' i ! Buanik e voe lipet an abadenn. Di- war an devezh-se o deus tizhet kaout pevar fost diwar ar pevarzek o devoa goulnnet. Hepken.
- 5/ - Aozet o deus un "dro-vale" betek fulortig Fañch MITTERRAND e Latche, d'an 21 a viz C'hwevrer. Kavet ganto eno kel lies a archerien hag a wez ! Degemeret e voe mestrata un dilenn anezho gant e wreg a c'hrateas dezho klask aozañ un em- wel gantañ. Gortoz bepred a reont...

Ha neuze, ar vanifestadeg. Er vani- festadeg e teuas war an dachenn skolioù all da reiñ un taol skoaz da SEASKA : DIWAN (Breizh), CALANDRETA (Okitania), BRESSOLA (Katalonia). Goulnn a rae SEASKA da gentañ bezañ skoazlet ent-efedus evit a sell ouzh an arc'hant, rak tremas mil

vec'h o devez o skoulmañ ganti. Ne vev-
ont e gwirionez nemet diwar an arc'hant
gonezet ganto dre aozañ gouelioù ha
treuzvankadennoù arc'hant graet gant
skoazellerien. Ar yalc'hadoù a dapont
kaout a zo ken treut hag ur vazh gwisket.
O vezañ m'emañ bihanoc'h niver an dud a
chom en Euskadi eget e Breizh, ha m'emañ
brasoc'h niver o skolioù, war-dro tri-
ugent, (DIWAN war-dro ugent) eo diaesoc'h
ur bern dezho dont a-benn anezhi. Da eil,
hag a-gor gant ar skolioù all e c'houlenn-
ent bezañ degemeret en ur gwir servij
poblek a zeskadurezh.

N'eus ket muioc'h a wall war c'houar-
namant Bro-C'hall da enframmañ SEASKA en
deskadurezh eget ar skolioù all a-seurt
ganti. Padal emañ ar sokialourien oc'h
embann war ar groaz e fell dezho krouñ
ur servij bras a zeskadurezh poblek.
Komzoù damc'holoet a dalvez e gwirionez
emaint e soñj lonkañ ar skolioù prevez.
Mat-tre, emezomp. Eus o zu-int, ar skol-
ioù prevez a gri forzh o buhez, ha dis-
winkal a ra an tu-dehou par ma c'hell
war an dachenn-emgann-se a ya a-vod
dezhañ evel ur vanegenn lardet. Skolioù
SEASKA, DIWAN, CALANDRETA ha BRESSOLA a
c'houlenn start eus o zu bezañ enframmet
en deskadurezh. Skouarn-gaoç'h a ra ar
gouarnamant outo avat.

Koumoulegezh politikerezh ar gouarna-
mant a zo deuet splann pell'zo da zao-
lagad an tu dehou. Ken splann all eo
deuet bremañ d'hor re. Nemet n'hou eus
ket ni selloù belbich ha sklaer-kenañ eo
deomp perak e nac'h enframmañ ar skolioù
a-seurt-se.

Petra 'ra eta kement a zebron da
Bariz pa glev anv anezho ?

Daoust ma embann ar gouarnamant ken-
koulz hag ar P.S. emaint a-du krenn gant
kelennadurezh ar yezhoù bihan, betek mont
da gomz eus "Digoll istorel dleet dezho"
(gwelout ar "Rapport Jordan") pennad O.F.
d'an 20 a viz Meurzh) ez eus
ganto cheñchamant ken krenn all a don pa
glevont komz a gelenn e brezhoneg, e eus-
kareg, hag all ...

Kelenn brezhoneg, euskareg, okitaneg,
Katalaneg : Ya, mat-tre. Gouzout a-walc'h
a reont n'eo ket re zañjerus pergen pa'z
eus tu hadañ un toullad kaer a skollhoù
war hent ar gelennadurezh anezho, evel ma
reas an tu-dehou en o raok.

Kelenn e brezhoneg, e euskareg, e
okitaneg, e katalaneg : Nann. Krenn.
Fin a-walc'h int da c'houzout e c'hell
dout diwar se un dra dañjerus da unded
sagr Bro-C'hall : adperc'hennadur hor
yezhoù gant hor pobloù. Rak ma n'eus bet
biskoazh gwelet na den na pobl ober gant
ur yezh kelennet (n'eo ket abalamour ma
vez kelennet saozneg pe ne vern pe yezh
all eo e vez implijet gant an dud war o
buhez pemdez, hag heñvel-kont e vo evit
hor yezhoù-ni), eo aes a-walc'h kompren
e ray an dud gant ur yezh o devo bet o
holl zeskadurezh enni. DRE MA VO AR
YEZH-SE O BENVEG-MEIZAN, E VO IVEZ DRE
RET O BENVEG-KOMZ.

Pell da vezañ nay eo gouarnamant(où)
Bro-C'hall. Stad wirion hor yezhoù hen
diskouez splann. N'eo ket int-i a roy

deomp an tu nemetañ hon eus da adper-
c'hennañ hor yezhoù hag hor personelezh.
N'emañ ket enta e-tal da blegañ deomp
war ar c'hraf-se, nemet e ve rediet d'hen
ober.

Neuze, penaos rediañ Pariz da zegemer
hor skolioù ha da reñf dezho tu da gas o
c'hefridi da bennvat ?

Gouzout a ra ar gouarnamant o deus hor
skolioù mil boan o tiskoulmañ o c'hudenn-
où arc'hant. Soñjal a ra dezhañ e
skuizhimp ha diwar skuizhañ, c'hwitañ ha
diwar c'hwitañ, kreviñ. Ha setu diskoul-
met ar gudenn jablus-se evitañ. Daoust
d'ar pezh a embann ar P.S. e raskrid e
vennad-lezenn, ez eo hemañ e soñj gwir-
ion :

"Lavarout a ra ar P.S., pe kentoc'h
Le PENSEC ha LAURRISSERGUES, bepred e
raskrid ar mennad-lezenn, ez int soñjet
anavezout ar c'hlasoù-se evel "classes
expérimentales". Da c'houzout zo c'hoazh
petra 'zo kuzhet e-dan an "expérimentales"
mañ ... Adal na vo ket sellet ouzh hor
bugale evel loened iskis ... Pe neuze, e
vo lakaet hor skolioù e renk an holl ar-
nodoù, hag ur wech echuet arnodañ, un
nez d'o gouzoug.

Gouzout a ra ar re a bkd gant ar
skolioù-se o devo mui-ouzh-mui a ziaes-
terioù o tastum arc'hant a-walc'h da
lakaat anezho da vont en-dro, dreist-holl
dre ma vrasay an niver anezho. Hogen
n'eus nemet p'hor bezo ur bern skolioù
DIWAN e Breizh hag ur bern skolioù heñvel
er broioù-all e taole evezh ar gouarna-

mant outo. Da gentañ, dre ma vo pouez
a-walc'h ganeomp er c'heñver-nerzhioù,
da eil dre na asanto ket gwelout un niver
re vras a vucale skoliataet hep n'en de-
fe sell ebet war o deskadurezh. Neuze
ez enframmo ar skolioù hag e c'hellimp
ober labour efedusoc'h c'hoazh. Met ret
eo deomp talañ outi betek eno.

*"Aurient bien tort ceux qui décideraient
de fermer les yeux, d'ignorer l'impact
populaire de ce mouvement ... ou de
compter sur son étranglement au plan
financier".*

Ret eo da hep bro sikour he skolioù.
Ret eo da skolioù pep bro kizidikaat an
dud d'o stourm hag o broudañ da vont war
o sikour p'o galvint da vanifestiñ. Neuze
hepken e vo tu d'an holl skolioù kenstourm
ha kenvanifestiñ. Neuze e vimp kreñv a-
walc'h da lakaat ar gouarnamant da soub-
lañ ha diframmañ digantañ kement a zo
dleet deomp. Eleze, estregret kaozioù
kaer, met dibourvez.

Evit a sell ouzh enframmadur hor skol-
ioù e kaver tud, stourmerien, hag a sav
a-enep. Feurvuiañ ez eo broadelourien.
Hag int, reizhpoell en o soñjoù, a venn
e chomfent distag diouzh deskadurezh ar
Stad-C'hall. Komprenus eo o soñjoù. Di-
komprenusoc'h avat eo o emzalc'h, rak an
alliesañ eo int-i dres-a-walc'h na rount
gweneg ebet hag a vir ouzomp neuze da
c'hellout bevañ distag. Kaer eo ar
soñjoù. Nul an emzalc'h. An daou ne
reont ket atav ur c'hement. Siwazh dezho
Ha deomp ivez.

Setu un toullad traoù hag a c'hoarvez en Euskadi er mareoù-mañ, hag a sell endeeun ouzh SEASKA. Peogwir ne c'hell ket mui SEASKA talañ ouzh he dleoù, ez eus bet divizet ne vefe mui paet karg sokial ebet war gopr an implijidi. Evel-se e vo espernet kant ugent milion ar bloaz. Ar gouarnamant o faeo ma kar. Paet e vezo ar skolaerien hag an implijidi all entreizh hep bezañ gwazh e keñver ebet.

Kavet e vez en Euskadi, tud, Euskariz pe get, na reont mallozhtouenn foultr 'bet nag eus o yezh, o fobl pe o bro. Ar c'hontrol-bev, koulz hag e Breizh e reont o gwir wellañ da stlabezañ kement a denn da adsavidigez hor gwirioù. Evel e Breizh, ez eus kelaouennoù en o fisoù hag er bannoù anezho eo e skuilhont loustoni a-enep da SEASKA ; en ur glask hadañ mesk e spered an dud ouzh o lakaat da gredif n'eus nemet ur c'hement eus SEASKA, Iparretarak, E.T.A. hag all ... "Sud-Ouest", un torch a-seurt gant an "Télégramme" amañ, a zo ur c'haer he gwelout war an dachenn-lor-se. Setu unan eus he zaolioù kaer diwezhañ, a ziskouez splann e kenstrivont gant beg-e-dog enep kement tra liv euskarat warnañ, en ur ginnig kemmeskailhez lous d'o lennerien.

Un takad 'zo e voe skrapet arc'hant en un ti-bank. Kavet e voe ar paotr ha gwelet buan e oa un disranner euskarat anezhañ. Nemet e chomas beg-e-dog gant e fri war ar gloued pa glaskas an arc'hant Ardremez ebet anezho. Setu neuze kaoc'h kras e bragoù an eotred-kordenn hag int ha klask e-men an diaoul e oa bet lakaet an arc'hant-se en emplij gant Euskariz -

Nepell goude, e voe mindrailherezet daou C.R.S., unan a lipas e loa war an tach, egile a c'hortozas un tammig kent lipat e hini. Krasoc'h e teuas ar c'haoc'h da vezañ e bragoù an archerien, hag int neuze da rastellañ amañ-ahont hervez o boaz e seurt plegoù ha mont da sevel o fri e burev SEASKA e Baiona. Kement ha chom hep distreiñ e gwenn e kasjont ganto paperioù ar c'hontoù, hag ivez betek ober an dud a 'n em gave d'an apoent er burev.

Pluernerien lous "Sud-Ouest", ken ranell ha biskoazh, a voe un drugar evito sevel o c'helachoù diwar an afer. Hag int hag aozañ o soubenn. O tiskanañ war ar seizh ton warn-ugent da ziskleriadurioù ar fliked a oa eno en o boued leun o lakaat krediñ, dre o "gweladenn" e oa un ere bennak en holl euskarachoù-se. Evel reizh, e voe laosket an holl da vont, goude bezañ lezet roudoù diskred warno. Nemet perak, a soñj deoc'h, e oa bet tapet paperioù-kontoù SEASKA ?!.. da gentañ evit gouzout hag-eñ e oa gant SEASKA e oa aet arc'hant ar skrapadenn, da eil evit lakaat an dud da gredif kement-se, gwir pe get.

Skuizh-poazh o welout emzalc'h ar "gelaouenn"-se en o c'heñver, ez eas ur strobdadig tud eus "Laquntza" d'ar burev anezhi ; bep a gelorniad kaoc'h-houidi ganto ; hag eno, bec'h d'ar mogerioù, d'an arreburi, d'ar paperioù hag all !.. An deiz war-lerc'h, fier-droch, ec'h embanne laouen komzer "Radio-Adour" : Emañ "Sud-Ouest" e-barzh ar c'haoc'h !..

Salv deomp ma chomo ennañ

Martial MENARD

KEMBRE

DOUR KEMBRE

Kement hag un danvez kaoc (diwar-benn an amzer) eo bet ar glav a gouezh war Gembre un danvez a bouez evit an emsav broadel e Kembre abaoe ouzhpenn 25 bloaz. E 1955 e voe divizet gant Kuzul Dour Kêr Liverpool beuziñ saonenn Tryweryn d'ober ul lenn a zastumfe an dour a ziskenn eus menezioù Kembre d'e gas da dud Bro-Saoz. An dra-se oa beuziñ kêriadenn Capel Celyn e-kichen Y Bala. Kalz a dud a enebas ouzh ar raktres hag a stourmas outañ e Kembre. Tarzadennoù a voe war al lec'h ma oa ar stankell da vezañ savet da zerc'hel dour. Komzet e voe eus "Free Wales Army" (Arme Kembre dieub). Mes daoust d'an holl stourmad e voe bezuet an draonienn hag ar gêriadenn ha savet e voe ur stankell heñvel e Clywedog e-kreiz Kembre. Pal ar sevel fardelloù-se divizet gant Kuzulioù Dour Bro e Bro-Saoz oa asuriñ e vefe pourvezet an ijinerezh e Bro-Saoz. Ne voe tamm gounid evit Kembre. E gwirionez e voe kollet douar labour mat ha strewet kevredigezhioù kembraek ha tiegezhioù a oa bet o chom eno abaoe kantadoù a vloavezhioù.

Bremañ e sav klemm c'hoazh abalamour d'an dour e Kembre. An draen-fulh ar wech-mañ eo an notennoù dour a vez kaset da bep tiegezh e Breizh-Veur. Bez ez eus daou Guzul Dour e Kembre, Kuzul Dour Broadel Kembre hag ivez Kuzul Dour Hafren Trent (Kêr Virmingham) a gemer

dour a zeu eus traonienn Hafren (Stêr Hafren a zo unan eus stêrioù bras Breizh-Veur a vez ganet e-kreiz Kembre). An Doried e Londrez eo a zo kiriek eus an doare iskis-mañ da reolennañ an dour e Breizh-Veur.

Gortoz a reer notennoù an dour da sevel eus 18 % bennak e Kembre met eus 7,4 % hepken e Birmingham (unan eus ar c'hêrioù bras a gemer kalz eus an dour kaset er-maez eus Kembre). Kuzulioù Dour Severn Trent o deus an dour marc'had-mat-tre hag adwerzhet e vez ganto da Gembre 60 santim ar mil galonad (1 galon = 4,55 litrad) !! Evit ar mare e kas en diavaez Bro-Gembre an hanter eus an dour a vez kenderc'het amañ da lavarout eo war-dro 240 milion a c'halonoù bemdez.

Bremañ emañ Plaid Cymru oc'h aozañ ar stourm da cheñch ar sistem evit n'o dije ket tud Kembre da baeañ kement evit o dour. Ar bloaz-mañ o devo tud Kembre da baeañ 6 milion a lurioù saoz muioc'h eget tud kornioù-bro evel Birmingham e Bro-Saoz. Plaid Cymru a fell dezhañ kacut un digresk war an taosoù dour paet gant ar Gembreiz mes ivez ur c'hresk divizet gant Kuzul Dour Kembre eus 30 santim evit 1.000 galon dour bevezet e Bro-Saoz. Hervez ar Plaid e tegasfe kement-se 40 milion a lurioù saoz ouzhpenn da Guzul Dour Kembre hag e vefe krouet 2.000 post labour nevez.

Evel darn eus ar stourmad e c'houlenn ar Plaid Cymru ouzh Gembreiz chom hep paeañ o notennoù dour. Abaoe derou ar stourmad d'ar c'hentañ a viz Meurzh o

deus kalz a hiniennoù kaset o notennoù dour en-dro da Guzul an Dour. Kalz a skridoù-klemm a zo bet sinet ivez a-enep an notennoù dour. Er parlamant e Londrez en deus lavaret Dafydd WIGLEY, Rener Plaid Cymru : "Kroget eo bet ar stourmad teir sizhun 'zo hepken. Na tale'h da vont evel bremañ e vo da gen-veriañ gant ensavadegoù Rebecca er c'hantved tremenet a-enep direizhderioù ar c'hlovedoù taosoù". (Merc'hed Rebecca a voe brudet da vezañ lakaet an tan en tiez taosoù dre Gembre a-bezh e kreiz ar c'hantved diwezhañ).

Gwelet e vo penaos ez emdroio stourmad Plaid Cymru hag ivez hag-eñ e vo rentet ar justis da Gembreiz.

KEMBRE DINUKLEEL

An Emsav evit an Dizarmañ Nukleel a zo bet ganet en Europa er bloavezhioù diwezhañ a zo deut muioc'h-mui war wel e Kembre nevez 'zo. Pal an Emsav Dizarmant betek bremañ e Kembre a oa lakaat pep Kuzul Kontelezh e Kembre da zivizout embann e oa o c'hontelezh unan dinukleel. Kement-se a dalvez e nac'h ar c'huzul e vefe savet bombezennoù atomek war e zouar, e vefent miret eno pe evel just tennet diwarno. Pouezus eo pa ouezer eo ret kaout aotre ar c'huzul kontelezh araok gellout sevel tra pe dra er gontelezh.

Un trec'h arouezel eo hemañ. Ret eo d'erc'hel koun ez eus div greizenn nukleel



Gwynfor Evans ha Peter Segger e kontelezh Clwyd gant an diskleriadur enep-nukleel

e Gwynedd a gendere'h tredan - mes ivez dre natur an doare "emrannañ" (nuclear fission) a grou plutonium - danvez a zo ezhomm deuzoutañ evit ober ur vombezenn atomek. N'eus forzh penaos en deus lavaret Kuzul Kreiz ar C'henderc'hañ Tredan (C.E.G.B. Central Electricity Generating Board) ne werzhent ket ar plutonium d'ober bombezennoù met e talc'hent anezhañ evit ar reaktor nukleel boueta fonnus (fast breeder nuclear reactor) - setu e kred da bep kuzul kontelezh e Kembre ez eo a-benn-bremañ Kembre ur vro dinukleel.

Kuzul Kontelezh Clwyd a voe an hini diwezhañ da zivizout e vefe o c'hontelezh unan dinukleel hag en ur vodadeg vras er Wyddgrug en deiz-se e voe kinniget un diskleriadenn "Kembre dinukleel" gant Gwynfor EVANS, kent rener Plaid Cymru, ha Peter SEGGER, kadoriad an emsav a-enep nukleel e Kembre. Gwynfor EVANS a lavaras : "N'eo ket posupl eo ur brezel nukleel a-benn bremañ mes gwirheñvel zoken eo ... Mar deo gwir ne c'hellomp ober netra evel hiniennoù, eo gwir ivez ez eo spered an dud un nerzh spontus ha na 'z omp mennet a-walc'h evit na vefe ket a vrezel nukleel e c'hellomp kas hon mennad da benn vat".

Kinniget eo bet an diskleriadur da rener parlamant Europa e Strasbourg hag emeur o klask aozañ un emvod eus ar c'annaded europat da harpañ essav an dizarmant.

Kement-mañ en deus lavaret Peter SEGGER "Nafex eo ur c'hamed bihan war-raok a zo bet graet e Kembre mes pouezus eo hon c'hemenn evit miliadoù a dud en Europa

en he fezh ha pelloc'h c'hoazh".

BANGOR, SKOLAJ-VEUR HANTERNOZ KEMBRE

Seizh skolaj he deus skol-veur Kembre, skolaj skol-veur hanternoz Kembre, Bangor, skolaj Aberystwyth, skolaj Aber-tawe, skolaj Llanbedr, skolaj ar skol-veur, Caerdydd, skol gellennerien Caerdydd hag ivez skol vedisinerzh Caerdydd. 18.000 bennak a studierien a ra o studio e skol-veur Kembre ha diwar an niver-se un tregantad bihan anezho eus Kembre.

Skolaj Bangor a ro bod da 3.000 studier bennak hag en o mesk da 200 bennak eus Kembre. Bez e c'heller soñjal el levezon saoznekaat 'en deus bet skolaj Bangor war gêr Vangor (war-dro 14.000 a dud) n'eo ket hepken abalamour d'ar studierien mes ivez d'ar gelennerien ha d'ar goskor galvezel deut eus Bro-Saoz da chom er vro. 20 vloaz bennak 'zo ne oa nemet 500 den bennak, studierien ha koskor, e skolaj Bangor hag an darn vrasañ anezho Kembreiz kembraerjerien. Mes goude e voe ledanaet skol-veur Kembre, gant levezon Charles EVANS (unan a bignas an Everest gant Tersing ha Hillary e 1953) hag e harperien e voe saoznekaet skolaj kembraekañ skol-veur Kembre.

Pelloc'h eo en em unanet studierien ha koskor gembrak ar skolaj da stourm ouzh aczadur saoz ar skolaj. Stourmet e voe 5 bloaz bennak 'zo ouzh enezel'c'omp kembraek Unvaniezh vroadel ar Studierien. Disoc'h ar stourmad-se voe savidenn Unvaniezh Studierien Skolajoù Bangor, er



SK. Y CYMRO

sindikad savet gant ar studieren gembraek o-unan (U.M.C.B.).

N'eus ket pell eo adkroget ar stourmad. Kembreiz a fell dezho e vefe kresket niver an danvezioù kelennet e kembraeg haq ivez e teske pep kelenner eus ar skolaj kembraeg - ma vez kemeret kelennerien ne ouzont ket kembraeg e tleont bezañ kaset d'ur staj Ulpan (kentelioù hountañ 'barzh).

Izili ar Sindikad Kembraek (U.M.C.B.) o deus livet sloganioù evel "Treitouriezh an intelektual", "U.C.N.W. - muntrer ar yezh" ha "Deskadurezh e kembraeg penn-dabenn". Dalc'het ez eus bet burevioù, graet freuz e kentelioù 'zo. Lod eus ar kelennerien gembraek, izili eus kelc'h ar kelennerien gembraek, o deus tabutet taer

evit kaout muioc'h a zanvezioù kelennet dre ar c'hembraeg ha muioc'h a studieren gembraek er skolaj. Aozet ez eus bet ur vodadeg stourm gant an unvaniezh kembraek un devezh yen ha gleb eus penn-kentañ miz Meurzh e Bangor haq ez eus bet ouzhpenn 500 a dud o tibunañ e Bangor da ziskouez o skoazell d'ar stourmad da adkembraekaat skol-veur Kembre.

Pelloc'h e seblant e kroqfe ar strivoù da zougen frouezh. Mignon Charles EVANS, Lord KENYON, Rener kuzul ar skolaj, en deus ranket reiñ e zilez. Embannet ez eus bet nevez 'zo ivez e oad o prientiñ peder c'hentel all e kembraeg a-benn miz Here a zeu er skol-veur.

John DRIE

* ur fazi 'oa bet graet dindan skeudenn Gwynfor Evans en niv. 13 : n'eo ket W. Williams met Dafydd Wigley a zo gantañ. Gant hon digarezioù.

IWERZHON

1981 - UR VARNADENN

Ar bloavezh tremenet a zo bet fall, hervez ar pezh a lavar ar bolitikerien e-barzh hanternoz Iwerzhon. Aet e oa ATKINS kuit, deut James PRIOR da ren an traoù evit ar gouarnamant saoz. Ar bolitikerien n'o deus ket kavet ar parlamant o devoa c'hoant. Ma vev ar re-se diwar bruderezh n'o deus ket bet kalz anezhañ avat ! Divizet eo bet gant an Unionist Party of Northern Ireland (re PAULKNER, ur strollad dousik sañset) en em zivodañ. Ar vuhez a oa erru start evito, muioc'h-mui abaoe marv Faulkner. Kollet o fenn bras, ne oant ket gwall efedus. Ouzhpenn-se ne oa ket chomet kalz a blas evit seurt politikerezh pa ne oa ket parlamant ebet ken.

Pevar unionist anavezet mat a zo bet lazhet (s.o. Al Lanv diwezhañ, evit marv R. BRADFORD, kloer ha kannad, un unionist taer anezhañ). "Brezelioù diabarzh" a zo e-touez an unionisted, etre strollad PAISLEY (an D.U.P.) haq ar strollad brasañ, an hini koshañ, an Unionist Party ("Official Unionist Party" a vez graet dezouto abaoe ma zo lod kaer a strolladoù unionist). Emañ PAISLEY war grefavaat dalc'hmat. Ur brezel diabarzh all a zo e-barzh an "Official Unionist Party", etre ar re zouz haq ar re daer. Soñjal a ra izili ar strollad dre vras n'eo ket gwall efedus James MOLYNEAUX evel rener ar strollad. Rebechet 'zo bet

dezhañ leuskel PAISLEY da respont da gentañ evit ar bobl unionist. Moarvat e vo skarzhet MOLYNEAUX kuit haq e teuo Harold Mc CUSKER en e blas. (Mc CUSKER a zo kannad kontelezh Armagh e-barzh Parlamant Londrez ; ne gomz nemet eus kudennoù surentez, biken ne vo archerien ha soudarded a-walc'h o stourm a-enep d'an dercristed).

An unionisted o deus aon da vout laosket o-unan gant ar Saozon, abalamour d'an emvodoù a zo bet etre pennoù ministred Iwerzhon ar C'hreisteiz (HAUGHEY da gentañ, ha FITZGERALD war-lerc'h) haq an "itron houarn". Gwelet en deus PAISLEY kement-se ha ne ra 'bet komz eus an "dreitourien" saoz !

LABOURADEGOU SERRET ?

Goude ur bloavezh labour nemetken emañ ar gevredigezh DE LOREAN e-barzh Belfast (2.000 micherour) tost da vont da goll, en abeg da aferioù arc'hant. An DE LOREAN-se (un Amerikan eo) en deus ijinet ur seurt karr-tan nevez, "de luxe" evit ar re binvidik. Gouennet en deus digant ur bern broioù reiñ arc'hant dezhañ da sevel ul labouradeg lec'h ma vefe graet ar c'hirri-tan-se. Abaoe ar bloavezhioù 1960 emañ ar Saozon (haq unionisted 'zo, evel O'NEILL, ar ministr kentañ etre 1963 ha 1969) o klask sevel labouradegoù asambles gant embregerien eus broioù estren, e-barzh hanternoz Iwerzhon. Roet o deus 67 milion a lurioù saoz da DE LOREAN. Soñjet o deus e rafe al labouradeg-se vad da gornog

kâr Velfast, da lavarout eo, o devoa spi en em gontantfe an dud (broadelourien, e-barzh ar c'horn-se eus Belfast) eus al labour. Ne vefent ket kement-se a-du gant an I.R.A., anat eo ! m'o defe bet labour. Evit ar mare e klask ar gouarnamant saoz harzañ ouzh al labouradeg da vont da goll. Ouzhpenn-se ez eus bet lakaet mil den er-maez eus o labour en ur chanter sevel baqoù, HARLAND & WOLF, e-barzh Belfast ivez. Unionisted eus ar bobl eo ar mil den-se. Evit aferioù ar baqoù ez a fall an traoù abaoe un nebeut bloavezhioù. Kazi katolig ebet ne labour e ti HARLAND & WOLF (savet war-dro 1850 ; n'o deus ket ankounac'haet ar vroadelourien e oa bet taolet er-maez eus o labour 10.000 den er bloavezh 1921 gant ur meskañ archerien unionist ha labourerien brotestant ...)

EKONOMIEZH AN HANTERNOZ

Tuet eo ekonomiezh an hanternoz war an "trede" rann evel ma lavar ar re a zo barrek war an danvez. Ouzhpenn 60 % eus ar vicherourien a labour evit ar "servijoù", al lodenn vrasañ anezho paet gant ar gouarnamant. Evel-se emañ staget muioc'h an hanternoz ouzh Bro-Saoz. Abaoe 1969, ez eus bet kollet etre 30 % ha 35 % eus ar postoù e-barzh labouradegoù hag ijinerzhioù ar vro.

MAR AR "FLAC'H HOUBARN"

Darbet eo bet da Vark THATCHER mervel e-barzh hanternoz Bro-Afrika. Gwelet eo

bet e vamm, daloù 'n he daoulagad.

"Canari-Inchains" en deus lakaet un dresadenn ma vez gwelet warni an Itron THATCHER o lavarout "Pa soñjan e vije bet posupl dezhañ mervel gant an naon, evel an disterañ hini eus an Iwerzhoniz".

112 DEN MARVET

Sifroù (adalek ar c'hentañ a viz Genver betek an 13 a viz Kerzu 1981) :

- 48 soudard haq U.D.R.
- 18 den disoudard lazhet gant an arme
- 13 den disoudard lazhet gant loyalisted
- 6 den disoudard lazhet gant an I.R.A. pe an I.N.L.A.
- 3 den disoudard marvet e-barzh un emgann stradaed
- 5 a dopinerien lazhet gant an I.R.A. pe an I.N.L.A.
- 2 eus an I.N.L.A. marvet gant o zarzhadenn
- 10 o deus graet an harz-debriñ betek ar marv,
- 3 den all, n'ouzer ket penaos int bet lazhet
- 4 loyalist anavezet, lazhet gant an I.R.A. (Bradford, Sir N. Stronge, J. Stronge) pe gant an I.N.L.A.

TREC'H EBET

An Aotrou FITZGERALD a zo bet ministr kentañ stad ar c'hreisteiz, eus miz Mezheven 1981 betek ar 27 a viz Genver 1982. Savet en doa e c'houarnamant gant e strollad, Fine Gael (mirour, a-du gant ar Saozon evit ar pezh a sell ouzh kudenn an hanternoz) hag ar strollad Labour (micherourien, arc'hant digant ar sindikadoù ha kreizour). Evit kaout ar muiañ niver avat e oa ret dezhañ ober un emglev gant un dornad kannaded ne oant e-barzh strollad ebet. Evel-se e oa an traoù goude mouezhiadeg; an hañv 1981.

| | | |
|---|---|----|
| Fine Gael | = | 65 |
| Labour | = | 15 |
| Fianna Fail (enebourien ar gouarnamant) | = | 79 |

Eizh kannad all a oa, daou anezho - Kieran DOHERTY ha Paddy AGNEW - e-barzh Long Kesh, ne oant ket evit dont. Ret e oa da FITZGERALD kaout mouezhioù tri eus ar re all d'an nebeutañ, evit ma talc'hfe mat e c'houarnamant.

Pa 'z eo bet echu an harz-debriñ e chome kudenn kontoù ar vro. Lavaret o deus FITZGERALD hag e strollad e oa poent lakaat urzh enno. Amprestet o deus paotred Fianna Fail re a arc'hant d'ar broioù all, emezo. (Ouzhpenn 1.200 milion lur iwerzhonat e 1980, da skouer). 80 % eus an tailhoù paet gant an dud a ya kuit eus ar vro, da rentañ amprestadennoù Fine Gael a lavare e oa tu da echuiñ gant politikerezh an amprest-

adennoù ma vefe sirius ar bobl. Ar vis-tri o deus lavaret memes tra evel just.

Kinniget en deus ar c'hengouarnamant ar budjed e-kreiz miz Genver. Divizet o deus :

- 1 - Lakaat 25 % tailh talvoudegezh ouzhpenn (T.V.A.) war an dilhad, kreskiñ priz an evajoù hag ar butun, kuit da reiñ arc'hant evit al laezh hag ar bara hag all, hag all ...
- 2 - E vefe roet muioc'h a arc'hant (25 %) d'ar re zilabour, d'ar re gozh, d'ar vugale.

Ar parlamant ne oa ket a-du gant me-nozioù ar gouarnamant. Nac'het eo bet ar budjed (82 mouezh a-enep, 81 a-du). Jim KEMMY, eus Limerick (sokialour, enep-broadelour anavezet) eo an hini en deus lakaet ar gouarnamant er porzh.

AN 18 A VIZ C'HWEVREK

N'eus ket bet komzet nemet eus traoù an arc'hant ha kontoù ar vro a-raok ar vouezhiadeg.

Emsav ar yezh en deus klasket kaout promesaoù digant ar strolladoù. N'eus nemet ar Sinn Féin (Provo) en deus lavaret e oa a-du. Komzet o deus ar strolladoù eus an arc'hant, hep komz, naq eus an hanternoz naq eus ar yezh. N'eus ket bet komzet kalz eus ar skolioù kennebeut Ar Sinn Féin (Provo)

en deus graet ur prosez a-enep ar gouarnamant, da gaout ar gwir da gomz e-barzh ar skinwel hag ar skingomz. N'eo ket kloz c'hoazh an traoù, kondaonet eo bet ar gouarnamant gant ul lez-varn met d'al lez-varn veur e vo da zivizout hep dale.

Klask zo bet harzañ ar Sinn Féin (Provo) ha Bernadette Mc ALISKEY (danvez-kannad ivez) dre forzh peseurt mod. Katoliged 'zo o deus lakaet skridoù e-barzh ar boestoù-lizhiri e-kreiz Dulenn, da lavarout e oa a-du Bernadette Mc ALISKEY evit ar sioc'hanañ.

Ar gazetenn "The Irish Times" he deus skrivet "N'eo dellezek danvez-kannad ebet eus ar Sinn-Féin da gaout ur vouezh, daoust forzh peseurt talvoudegezh en dije".

An disoc'h :

| | |
|------------------------------|----|
| - Fianna Fail | 81 |
| - Fine Gael | 63 |
| - Labour | 15 |
| - Sinn Féin (workers' Party) | 3 |
| - Re all | 4 |

AR REPUBLIKANED

Spi o doa tud ar Sinn Féin (Provo) e virfent ar mouezhioù o doa bet warlene. 42.000 mouezh o deus bet e 1981, e-barzh 11 rann-vouezhiañ. Ar wech-mañ n'o deus bet nemet 16.894 mouezh (e 7 rann vouezhiañ). Ma vez lakaet o mouezhioù

gant re an I.R.S.P. (c'hwec'h Kannad) ha re Bernadette Mc ALISKEY "H-Block" o deus bet 21.000 mouezh. Danvezioù-kannaded ar Sinn Féin a zo bet kinniget 'barzh kontelezhioù lec'h ma zo kuzulierien-kêr hag all ganto dija - war an harzoù Leitrim (6 %) Cavan-Monaghan (68 %), Louth (8,5 %) ha kontadennoù Wexford (3,3 %), Longford - Westmeath (4,9 %). Ur prizoniad a zo bet kinniget e kontelezh Clare (Joe O'CONNEL, hag a zo e-barzh un toull-bac'h war Enez Wight, Bro-Saoz ; O'CONNEL en deus stourmet e-barzh an I.R.A. Bro-Saoz). 2,8 % eus ar mouezhioù a zo aet gantañ. Tud Sinn Féin o deus bet 1 % eus holl vouezhioù ar vro.

Lavaret eo bet e vefe ret dezho kinnig muioc'h a dud. Tud ar Sinn Féin all (sellit pelloc'h) o deus diskouezet ez eo ret dalc'hmat labourat war an dachenn evit mirout mouezhioù pe kaout muioc'h a vouezhioù. Ar Sinn Féin (Provo) en deus lavaret ne gemerje ket ar gannaded o Flas er parlamant ma vijent trec'h. Hervez Daithi O'CONNAILL, e vo marteze dislavaret ar politikerezh-se ar wech a zeu. Marteze e vo erru skuizh tud Sinn Féin ar c'hreisteiz gant al labour politikel. (Izili an hanternoz o deus c'hoant stourm war bep tachenn dre ar stourm armet ha dre gannaded, met re ar c'hreisteiz a zo kentoc'h republikaned mod-kozh ... Tud o deus kalz a zisfiziañs eus ar parlamantoù) Ret e vo dezho dibab ha labourat, m'o deus c'hoant kas an traoù war-raok. War a seblant he deus ankounac'haet pobl ar c'hreisteiz amzer an harz-debrif.

An Aotrou Tony GREGORY (kelenner e-barzh ur skola) holl-tworzhonek e-barzh Dulenn) a zo kannad evit kreiz-kêr Dulenn Labour en deus GREGORY evit ar re baour, ar re zilabour (70 % pe muioc'h e-barzh e gorn) dija. Kuzulier-kêr e oa dija, ha dilennet eo bet ar wech kentañ. N'eo ket stag ouzh strollad ebet (daoust ma'z eo bet e-barzh ar Sinn Féin Ofisiel gwechall). En a zivizo peseurt strollad en do ar galloud. Mignon eo bet da Seamus COSTELLO (penn bras an I.R.S.P., lazhet e-barzh Dulenn e 1976).

MUIOC'H A C'HALLLOU GANT AR SINN FEIN OFISIEL

Sinn Féin the Workers' Party (Ofisiel, gwechall) en deus tri c'hannad.

- Sherlock (Cork, dilennet ar wech kentañ e 1981)
- De Rossa (Dulenn)
- Gallagher (Waterford)

Ar re-se, ha Jim KEMMY (Limerick) ivez, a zo bet dilennet abalamour d' o labour war dachennoù ar c'hornioù-bro, n'eo ket evit o strollad. Abalamour m'o deus sikouret unan da gaout un ti, unan all da gaout arc'hant an dilabour, lakaet ul lochenn-bellgomz ahont hag all. Evel-se eo bet dalc'hmat en Iwerzhon, evel just ! (Ar skouer vrudetañ eo aerbordh Knock, e kontelezh Mayo - ugent milion lur roet evit un aerbordh e-kichen Knock, lec'h m'eo bet gwelet ar wec'hez Vari kant vloaz 'zo ha m'eo deut ar Pab

e 1979 !)

Sañset e vije bet sikouret Sinn Féin The Workers' Party gant ar broioù ruz, pa oa fall an traoù evito (war-dro 1976-1977). Ar strollad-se a zo a-du gant Europa, a-du evit ma vefe savet labouradegoù gant kapitalourien estren en Iwerzhon. Tapet o deus galloud e-barzh ar sindikadoù, hag an dra bouezusañ-tout - e-barzh ar skinwel. Izili ar strollad e-barzh ar skinwel a zo bet emesk ar re o deus nac'het ar gwir d'ar Sinn Féin (Provo) da gomz, daoust m'en deus goulennet sindikad ar gazetennerien e vefe roet ar gwir-se dezho ...

Mignoned ar Broved gwechall, enep-broadelourien taer a-vremañ. An S.F.W.P. ne lavar ket penaos o deus savet o strollad na penaos eo aozet. Tud a zo o labourat leun amzer evito hag ar gannaded a zle paeañ kalz d'ar strollad. Labourat a reont start war o bruderezh. Lakait "enep-breizhat", e-lec'h "enep-broadelourien", peseurt strollad eo ?...

Sur eo, bepred, ez eus muioc'h a gannaded eus an tu kleiz er parlamant evit na oa bet abaoe pell 'zo. An S.F.W.P. en deus tapet mouezhioù digant al Labour, anat eo.

| | | |
|------------|---------------|----------|
| - Labour | 8,83 % d.l.e. | - 0,81 % |
| - S.F.W.P. | 2,33 % d.l.e. | + 0,58 % |

Rannet eo strollad al Labour disar-bein ar c'hengouarnamantoù, muioc'h-mui. Hag er gouarnamant e vo Fianna Fail ? Un enjann a zo bet e strollad ar Fianna Fail e-pad ar vouezhiadeg. Klasket ez

eus bet skarzhañ Charles HAUGHEY (rener ar strollad abaoe 1980). Chomet eo daoust d'e enebourien.



Michael O'LEARY : kollet ar galloud gant al Labour.

Charles HAUGHEY : an trec'h evit ar Fianna Fail.

Ar c'heleier diwezhañ : ar Fianna Fail a raio ar gouarnamant gant skoazell ar Sinn Féin the Workers' Party ha hini Gregory. Ha padout a raio ur gouarnamant a seurt-se gant difennour re baour kreiz-kêr Dulenn, ur strolladig sokialour, hag an tu dehou Fianna Fail (Martin O'DONOGHNE, kelenner war an ekonomiezh e skol-veur Trinity, e Dulenn, "Raymond Barre" Iwerzhon, da skouer) e-barzh ar memes "gwele" ?

Eamonn O CIOSAIN

HOR YEZH

HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH
 HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH
 HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH
 HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH
 HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH
 KELAOUENN A YEZHONIEZH SAVET E 1964
 GANT ARZEL EVEN. RENER: PER DENEZ
 KUMMANANT: 50 LUR DA Y. DESBORDES
 1, PLASENN CH. PEGUV, POUILLBRIANT
 29260 LESNEVEN. CCP 1439 51 ROAZHON

"TINTIN MARI HAG HE C'HANAOUENNOU"

13 kanaouenn a gaver war ar c'hasedig-mañ. Kanet int gant Tintin Mari eus Goulien hag enrollet int bet gant daspugnerien Bro-C'hlazik. Plijus-tre eo ar c'hasedig da selaou, brezhoneg brav kanet brav, gant un nebeud tammoù kaoz bev-kaer etre Daniel JEKEL ha Tintin MARI. Bez ez eus kanaouennoù trist ha reoù kalz farsusoc'h. "Intañv al lochenn" a zo fromus-tre ha "Daï, daï, daï" a zo ur wir blijadur evit ar vugale. Ar soñj mat o deus bet an daspugnerien da embann ul levrig gant testennoù ar c'hanaouennoù hag an ton anezho. Brezhoneg difazi eo a gaver ivez war al levrig, trugarez dezho eta ha da Dintin MARI da vezañ adroet d'ar Vretoned ul lodenn eus o herezh sevenadurel.



Goullenn ar c'hasedig hag al levrig digant : Daniel JEKEL, 13 ter str. Mathurin Méheut, 29000 KEMPER.

PRIZ : 38 lur (kasedig + levrig)

BREIZH

"BEZ 'Z OA UR SKOLAEREZ E SANTEZ ANNA A GEMPERLE"

Ar skolioù prevez ! Nag a drouz gant an tu dehou a-zivout ar skolioù-se a vez kavet stank ken-ken e Breizh. "Skol ar Frankiz. Skol ar Gristenien". "Peo hini a zo lip da zibab"... hag all ... hag all ... a bep seurt arguzennoù a vez distaget evit difenn skolioù a seurt-se. ha dreist-holl evit respont d'an tukleiz a lavar (dre vras), kreñv pe goustañk hervez ar mare " e vefe gwelloc'h ha reishoc'h kaout ur skol nemetken, lik. An holl a vije war an hevelep diazez, paour pe binvidik, hag ar relijion a chomfe ex-maez eus an deskadurezh a vez paeet gant tailhoù pep sitoian". Gwellet 'vo eta, petra 'c'hoarvezo. N'eo ket aze emañ an dalc'h hiziv, met memestra e plijfe din-me kontañ deoc'h un istor, unan gwir, a zo c'hoarvezet n'eus ket pell'zo dre emañ e Breizh-Izel. Ne lavarint ket resis e pelec'h nag an anvioù evit nompas lakaat diaes tud'zo met gwir eo pep tra.

Ur wech 'oa, ur wech 'oa ket, ur wech 'oa memestra, kredit ac'hanon ma karit, ma ne rit ket deuit da welout. Ur wech oa eta ur Vreizhadez yaouank a rae skol en ur barrez vihan eus ar menezioù. Labourat a rae kalz evit sankañ e penn he skolidi ar galleg, an douaroniezh, ar jederezh, me oar me ... hag ur wech dre vare, ar brezhoneg, pezh a vourre kalz

d'ar vugale, ha d'ar skolaerez, rak alies evel-se, ar Yannigoù diwarlerc'h ha na heuilhent ket re vat war an danvezioù all, a zeue da vezañ ar re ampartañ evit ur frapadig amzer. Ober a rae ivez ar "gelennadurezh relijioù", rak e skol ar Seurezed (e-giz ma vez lavaret dre emañ) an hini eo edo-hi o labourat. Mont a rae an traoù mat a-walc'h hag erruet mat 'oa-hi gant an holl gerent. Met un deiz e voe divizet serriñ ar skol abalamour ma ne oa ket bugale a-walc'h ken. Kinniget e voe d'ar skolaerez neuze echuiñ ar bloavezh-skol aze hag ar bloaz da zont e vefe ret dezhi mont 8 kilometr ac'hane, d'ur skol all. Netra grevus eta. Kaset e voe an holl skolidi ha skolaerien e vakañsoù, dibreder-kaer anezho.

Netra grevus ... betek an deiz ma voe dav dezhi tremen dirak ar rener ezh eskoptiek, e-kreiz an ehan-skol ouzhpenn ! Du-hont e voe goullennet diganti ur bern traoù met pas kement-se a-ziwar he labour, diwar-bouez he buhez ne lavaran ket... Klasket e voe lakaat anezhi d'en em santout kablus, rak soñjit 'ta an A.E.P. n'en doa ket ur bern fiziñs enni ken, ha person ar barrez e-lec'h ma oa-hi oc'h ober skol ne roe ket mel dezhi, tamm ebet.

Ar paour-kaezh skolaerez, sabatuet, a glaske kompren petra a lakae ar rener ezh eskoptiek d'ober war he zro evel-se, a-daol-trumm. Hag hi o labourat abaoe pellik a-walc'h dija, direbech. Ne vne ket dav dezhi gortoz re. Ar seurez ne zaleas ket da zislonkañ penn abeg ne

rebec'hoù.

- Un enklask a zo bet graet, emezi.
Emaoc'h o kenveañ gant un den dizime-
zet, un arzour brud fall warnañ, un
istrogell pagan. Soñjit 'ta hoc'h
eus turet plas e wreg hag hi dimezet
en iliz, dirak Doue".

Ar skolaerez badaouet a selaouet ar
brezegenn. Hegredik memestra. Gwir 'oa
pezh a zispake ar seurez. Kouezhet 'oa
hi e karantez evit ur paotr a oa bet di-
mezet anezhañ, ha ne ouie ket ar skolaer-
ez ken hag-eñ e oa ar gwir pe get
ganti ?

Evit peurechuiñ e voe lavaret dezhi :
"Kemmit ho puhez hag e vo roet deoc'h ur
post, ma ne chañchit ket ne vioc'h ket
adkemeret ...".

War un dro e veze graet un enklask.
Pouezet e voe war he c'herent, war an
amezeien, war he mignonezed hag a-benn
ar fin e voe piket dezhi ur chupenn eus
an dibab. Dipitet da gentañ, e savas
tamm-ha-tamm, er skolaerez heuet, blaz ar
gounnar hag avel an dispac'h. Divizout
a reas kenderc'hel gant he buhez... gant
un den dizimezet.

Ne voe ket roet ur post dezhi.... ne
reas ket skol ken.

Ne voe ket a-walc'h d'ar renerezh
eskoptiek klask c'hwen en he loeroù. Ur
vignonez dezhi a voe darbet dezhi kompas
kaout ur post goude he C.F.P. (ar Skol
Normal evit ar skolioù-prevez) abalamour

d'he darempredoù fall n'ez aent ket tamm
ebet gant spered ar skolioù kristen.

Fuloret, he zad a ginnigas embann roll ar
skolaerezed a genveve gant ur gwaz hep
bezañ euredet. Roet e voe ur post dezhi!

Eod pell d'ar mare-se eus ar c'houl-
zañvusted hag eus ar garantez kristen e
skolioù 'zo. Met gwir eo, an istor-mañ
a c'hoarveze e 1982.

N'eo ket bremañ e vije gwelet traoù
ken diboell !

Y.-M. PALE

BREMAN - 8, stradaed Hoche - ROAZHON

Bep 2 viz e teu ingal "BREMAN"
er maez. Bep 2 viz e vez kavet
'barzh keleier e brezhoneg aes
ha bev diwar-henn buhez ha stou-
eroù roue Breizh.

bremañ

an tu kleiz
aet 'barzh
poent sachañ,
tudou!



NIVERENN DOUBL

Bep 2 viz... n'eo ket trawalc'h.
Ur wir gazetenn a rankomp kaout
bep miz, bep 15tez, bemdez...
Met evit-se eo ret kaout muioc'h
a voneiz bihan o tont ingal :
KOUMANANTOU, setu 'pezh zo dav
kaout. (30 lur pe 50 L. skoazell)

DIWAN

O A L E D D I W A N

Ouzhpenn an deskadurezh a vez roet
d'ar vugale er skolioù mamm ha kentañ
derezh - hag evito e c'houlenn bezañ dege-
meret er servij poblek - emañ DIWAN o
klask reiñ ul lusk nevez o'ar sevenadur
e brezhoneg. Setu perak en deus prenet
e 1980 ur skol gozh e TREGLOU e kreiz
BRO LEON, evit ma teufe da vezañ kreiz-
enn sevenadurel Oaled Diwan.

E bal kentañ a zo ar brezhoneg. Tu a
vo da bep hini deskiñ ar yezh : ar re
yaouank, ar re vras, pe ar re gozh (evit
lenn ha skrivañ). Aozet 'vo ivez stajoù
e brezhoneg war bep tachenn sevenadurel
pe labourioù dorn. E TREGLOU e vo
ivez ur levr di haq un arnodlec'h klevet-
sellet evit studiañ hor yezh.

Bez e vo ivez ur greizenn digor da bep
strollad sevenadurel, d'an arzourien ha
d'an holl vretoned, bez e c'hellint la-
bourat asambles evit reiñ nerzh da seven-
adur Breizh war dachenn ar c'hoariva,
ar muzik, an dañs ... O c'hejadenn a
vrudo labour ar strolladoù haq a vo
dre-se tostoc'h ouzh Pobl Vreizh.

Digor 'vo ivez OALED DIWAN da dout
ar re o devo c'hoant bevañ e brezhoneg
e-pad o vakansoù pe o amzer dieub. Ka-
vout a raint aze bro dispar an tberioù,
evit anavezout gwelloc'h ar vuhez war vor
ha war ar maez en ur c'horn-bro brezhon-
eger.

Renket 'vo ar skol evit ma teufe da
vezañ ur greizenn sevenadurel efedus. E
1983 e vo tu da zegemer kendalc'hioù
evit ur c'hant bennak a dud, meur a emvod

ougent bennak a dud pep hini, stajoù war
ar brezhoneg (gant un arnodlec'h yezhel)
pe e brezhoneg, vakansoù-hañv evit ar
vugale hag ar familhoù, gouelioù a bep
seurt. Tu 'vo da vouetañ kant a dud,
da lojañ 50 a dud er c'hambreier hag 50
kampiñ. Ouzhpenn e vo ul levr di, ur
sal -video haq un ostaleri.

Obererezhioù a vo savet gant anima-
tour OALED DIWAN, met pep strollad a
c'hello kinnig aozañ abadennoù evitan pe
digor d'an holl. Forzh penaos digor 'vo
ar greizenn da bep hini evit studiañ,
debrifañ, lojañ pe dont da gaozeal brezhon-
eg.

Perc'henn ar greizenn eo OALED DIWAN
met meret e vo gant DIWAN. Ret eo dezhi
dont a-benn da gaout an arc'hant evit
paeañ he mont en-dro.

Evit DIWAN, kreizenn sevenadurel
OALED DIWAN a gendalc'h e emgann er skol-
ioù evit ar yezh, dre ledanaat anezhañ
da bep tachenn ar sevenadur ha d'ar bob-
lañs e Breizh.

Evit gouzout hiroc'h e c'hellloc'h
gouenn titouroù ouzh DIWAN -
DIWAN
29214 TREGLOU
Plg = (98) 04.05.42

Teul gouenn lodennoù

Anv

Chomlec'h

Pellgomz

Niver a lodennoù rakprenet (priz ul
lodenn = 100 lur)

Chekenn o kenglotañ

da gas en-dro da S.C.I. OALED DIWAN
29214 TREGLOU

CAPEs

UN DROIADIG E PARIZ

Beureik an deiz-se, e loc'has eus Roazhon ur c'harr-boutin, e bal = PANIZ (Pariz a zo kêrbenn ar vro a zalc'h hon bro abaoe re a vloavezhioù dija) ; pal ar c'harrad-boutin (war-dro daou - ugent den, holl studieren war ar brezhoneg e skol-veur Roazhon) : mont da aloubiñ Ministrerezh an Deskadurezh ar vro-se, ya, e lec'h ma vez dibabet ha divizet petra zo mat ha petra zo fall evit bugale geizh hon C'hornaoueg kollet. Ya, ar vakañsoù oa ivez ha keit ha ma vez tud o skiañ pe o tiskuiñ, e vez kavet c'hoazh un nebeud tud prest c'hoazh da stourm evit gouenn (hag adc'houlenn) ur c'hcapes brezhonek.



ar ministrerezh : breizhat ha brezhonek evit un endervezh.

Aozet e oa mat pep tra - digoust e oa zoken ar veaj : gwelloc'h c'hoazh eget Laker (betek ur poent nemetken : klaskit 'ta treuziñ Meurvor Atlantel gant un otokarr). Goude un hirig a hent, da-drubuilhet gant Armand Robin, setu ni e kêr ar Sklerijenn : petra bennak ma oamp skuizh, emaoamp raktal o klask lammat e diabarzh ar savadur ; ne seblante ket bezañ gwall laouen an evezhidi : renket 'ta damfrikañ bizied unan dioute evit gellout aloubiñ al lec'h. Buan ar gitoñioù. Buan ar Gwenn-ha-Du a-istribilh ouzh ar prenestr. Prest d'an emgann... ha netra Lezet omp bet aze, en trepas : ya kemmet an traoù abaoe *leu di's mae*, tu zo bet, memes, da gomz gant un toullad dioute, dreist-holl (Bez' ez eus kalz) ar wazed gwisket e glas teñval gant un iskis a gasketenn plantet war o fenn (bez' ez eus ivez merc'hed gwisket e glas met ne seblantont bezañ dedennet nemet gant ar c'hirri-tan). Hag e voe un hir a endervezh, hir, hir-tre. Tu oa bet deomp da vont el lec'h met tu ebet da vont pelloc'h ha perak mont kuit ? A-benn ar fin degemeret unan ac'hanomp gant un is-is-sekretour ha degemeret mat a-walc'h.

Ma, ne oa ket gwall splann an traoù evidomp-ni. Met ne vern. E oa an entan ennomp hag ar gwir ganeomp. Antronoz, gwelloc'h-gwell, disorc'henn, setu-ni o vont tramek Tir na n-og ar C'hallaoued (kentoc'h hini ar C'hresianed hag ar Romaned) : ar *Champs Elysées* ma fell deoc'h. Hag hep tamm diegi ebet, setu ar c'harr-boutin oc'h ehanif dirak porrastell ar palez hag a zo aze. Ha pennfollet holl ar gried a oa aze o

tiwall dor pennrener ar Republik. Bepred ken diaviz, emañ ar Vretoned bremañ o klask dibunañ : gwa dezhe ! Eüruzamant e c'honez al lezenn hag an urzh ha setu ar ganfarded-mañ kaset da Straed ar Sirk, dre chañs ez eus aze ivez un nebeud farouelled (bepred ar re gwisket e glas teñval) o lakaat an dud da c'hoarzhin.



e Straed ar Sirk : ur farouell o lakaat ar Vrezhoned da c'hoarzhin leun o c'horf

Degemeret c'hoazh gant un is-n'ouzon ket petra ha lavaret e vo respontet deomp an abretañ ar gwellañ.

Daoust da bep tra eo chomet tud ar vro hegarat ha seven en hon c'heñver : aet da gerc'hat hon c'harr, ambrouget ac'hanomp war hent an distro. Nag ur bobl seven ha kendruenus en hon c'heñver, ni, dic'houest da c'houzout e pelec'h emañ ar gwir sevenadur, ur vro ken jentil evidomp-ni. Ma, daoust da se, ez omp chomet bouc'h ha ni bepred da c'houlenn "CAPEs, CAPEs".



Betek pelec'h e yelo kanfarded ar c'hcapes brezhonek ? D'an daouzek a viz Meurzh o deus kredet un nebeud dioute aloubiñ ha plantañ freuz ha reuz a-dreuz un emvod tud sirtius o komz hag o prezeg eus ar gwellañ stumm da gelenn ar yezh. Kredet o deus memes ober fae war aozadurioù 'zo hag o deus graet kement evit ar brezhoneg er skol : kement o deus graet ken ne oar ket dileuridi ar re ziwezhañ-mañ ur ger a vrezhoneg. Hag ar re-se da brientiñ dazont hon yezh ! Kredet en deus zoken, unan dioute, ober goap eus an Aotrou Keravel, an holl a oar eo eñ en deus graet ar muiañ, hag a bell, evit ar brezhoneg abaoe hanterkant vloaz 'zo. War ar marc'had an dud diseven-mañ o deus mastaret mogerioù karr ar Rektordi, gant luganioù liesliv o c'houlenn ar c'hcapes ha se war c'heñver-vaen brezhon, gwa !

Pegoulz e komprenfont n'o deus chañs ebet da gaout ar c'hcapes evel n'o doa chañs ebet da gaout an aotreegus ?

LEVRIOU

HOR YEZH

N'emañ mui brud hor c'helaouenn yezhoniezh da vezañ graet. Hag hi gant he levrenn diwezhañ, anezhi div niverenn 142/143, a ginnig deomp eil lodenn studi-adenn Yann-Vark ar C'HOG diwar-bouez yezh Ivon KROG.

N'eo ket alies hor bez tro da reiñ pour diouzh-sour. Kentoc'h e vezomp pizh warno evit a sell ouzh an embann brezhoneg. Ar wezh-mañ avat, e c'hellomp teurel dezhi, digeuz -kaer ...

Kentañ lodenn ar studi-adenn, hag a blede gant an araogennoù, ar stagelloù, an adverbou a oa bet embannet war an niverenn 120. E tro 'oamp bet lakaet neuze da vezañ pinvidigezh ha dibarelezh yezh Eostig Kerinek - a zo, evit gwir, ur misi al lenn anezhi - Yann-Vark ar C'HOG, gant an eil kasadenn-mañ, a gadarna seder kement-se. Hag-eñ, e-ser hol lakaat da c'hlaourin gant an avi, a c'hrata deomp un dreds rara hag a blede gant geriaoneg Ivon KROG. Klauostre ne vimp ket gwazh.

Ne spir ket ul lennadenn evit kavout kompren plaen e yezh Eostig Kerinek. An neb a venn tennañ s'plet anezhi a vo ret dezhañ he gorro, he dibluskañ, he c'hweza, lakaat ar biz war-c'horre, he lipat, he disurmanañ, he zreiñ hag he distreiñ war he nav zu... pe neuze, mar bez berr gant e amzer, ober ul lenn da labour Yann-Vark ar C'HOG.

Pa vo studiet pervezh yezh hor skrivagnerien, ar re da vihanân a c'ule diouzh o savar, e vo bet neuze diskuzhet kalzig a draoù nevez, koulz gerioù ha troiennoù ha lakaet ivez splannijenn war un toullad krefen n'int ket sklaer-sklaer deomp evit c'hoazh.

Yezh Yann ar GOW, Youenn DREZEN, Loeiz HERRIAOU, Erwan ar MOAL, Ernest ar BARZHIG, Fañch al LAY ha kalz e re all a chom da vezañ studiet, evel m'en deus graet Yann-Vark ar C'HOG evit hini Ivon KROG. N'eus bet graet nemet ur spinañ outo evit poent, pa ranker mont en donig-donañ anezho. Neuze e vo renabilet holl c'halloudegezhioù hor yezh skrivet.

Pennadoù all a ya d'ober ar gelaouenn. En o mesk, kendalc'h labour Perig HERBERT "Notennoù Sonerezh". Ur c'haer a labour ivez, a vije bet gwell marteze embann en ul levrenn glok. Morse ne oa bet pleustret war dachenn yezh ar sonerezh er un doare ken sirius. Graet eo bremañ, ha graet mat. Begoù figus a 'n em gavo moarvat, o kavout abeg er yezh, re arbennik, re arnevez ... hag all. Avihanien touet, koustet a gousto. Leuskel int da risweal, n'eus anezho 'met divarreienn hor bo an distrob anezho gant ar c'hentañ barrad avel frankiz.

Niverennoù kaer eus "HOR YEZH" hor gortoz, e-doug ar c'hleuz, e pleg an hent, e nevez-hañ hor yezh-ni

Martial MENARD

Un nebeut mizioù 'zo ez eus deut er-maez ul levr anvet "UN SIECLE DE JOURNALISME BRETON" gant Fañch TREMEL (Lucien RAOUL). Troet eo al levr en e bezh war-

du ar c'helaouennoù e brezhoneg : "Journaliste et militant breton, l'auteur a tout d'abord systématiquement éliminé tout organe de transmission des idées toutes faites inspirées par Paris et diffusées à travers l'hexagone, tout organe d'acceptation ou de propagande officielle"

Ul levr sklaer-tre eo, ennañ pennadoù diwar-benn kelaouennoù dianav d'ul lod mat ac'hanomp marteze ha kelaouennoù anavezotoc'h ivez 'giz Feiz ha Breiz, Le Courrier du Finistère, Dihunamb ...

Spered ur mare eo a zeskomp diwar lenn al levr-mañ en e hed. Diamzeriet eo ul lod mat eus ar c'helaouennoù-se, dav eo soñjal atav da be vare eo bet skrivet an holl bennadoù-se. Setu un nebeut soñjoù deuet din goude bezañ lennet al levr pinvidik-mañ.

Kenstag eo bet ar relijion hag ar brezhoneg e-pad pell. Hervez ma oa ar brezhoneg tost ouzh kelon ar veleien ha dreist-holl an eskibien ez ae war-raok an embann kelaouennoù e brezhoneg. Savet eo bet Lihereu Brediah er Fe e Bro-Gwened da gentañ. Goude-se e Bro-Leon en deus an Aotrou Eskob Graveran roet an hent da vezañ heuliet gant lizherioù Breuriez ar Feiz. E pennad digerin an niverenn gentañ e lavar : "Meuli a reomp a galon vad doare ha danvez ar skrid brezhonek-ma. Ne gav ket d'eomp e ve didalvez d'hor beleien mui-karet teurel evez war ann aked ho deuz bet ar skrivagnerien da lakaat e-barz enn ho labour gerioù gwir vrezonek hebken, kerkoulz ha da heulia enn ho doare skriva eur reiz ato hevelep hag hervez skiant vat", (pajenn 79). Kudennoù skritur dija ! Kaset 'oa bet 'maez penn-skrivagner pajennoù brezhoneg ar gelaouenn Mignon al Labourer abalamour

ma veze implijet gantañ skritur ar Gonidec.

Gant Yann-Vari Perrot e krog soñjoù broadelour d'en em silañ e Feiz ha Breiz : titl ur pennad (1907) "Va gouenn, va yez, va bro".

Bras e vo c'hoazh pouez buhez an iliz er c'helaouennoù zoken pa ne vezont ket renet gant tud a iliz. Gant tud a uhel ouenn e vo savet ul lod mat a gelaouennoù istorel : enno e vez studiet e galleg, istor Breizh a-wechall, orin ar Gelted... Graet e veze studioù war an istor hep menoz politikel, daoust d'ar benn-renerien bezañ mirourien alies mat : "L'académie (celtique) interdit à tous ses membres dans les mémoires qu'elle publie... toute discussion qui pourrait blesser la religion ou le gouvernement". "Nous sommes du parti des gens de bien et des chrétiens, du parti aussi des bons français [Revue de Bretagne et de Vendée, La Borderie]. Bez 'zo "la petite patrie", ha "la grande patrie". Pa zeu poent ar brezel '4 ez a memes ar Vretoned emskiant d'ar brezel gant nerzh. "La tâche que nous avons entreprise ici depuis bientôt vingt ans, se trouve en ce moment et brusquement dominée par une autre plus haute et plus grande. Celle de la défense de la patrie française à qui, en 1914, comme toujours lorsqu'elle fut en danger, les Bretons restent inébranlablement fidèles" (Niverenn 230 Le Clocher Breton). Bez e oa Le Clocher Breton ha L'Hermine kelaouennoù breizhat e galleg o klask stourm ouzh stumm parizian al lennegezh. Gant Louis Tiercelin ha J.G. Roparz e oa bet savet "Le Parnasse breton contemporain". Loeiz Herriou ne zistroas gwech ebet 'pad ar brezel.

Ne grog da vat ar stourm politikel nemet gant an U.R.B. hag ar P.N.B. war-lerc'h e 1912. N'eo ket gwall sklaer c'hoazh hentenn ar strolladoù-se, e galleg e vez renet ar stourm. Setu perak e sav Loeiz Herriou, Andreu Mellac ha Taldir ur strollad brezhonekoc'h, an F.R.B.

Ar stourmer sokialour kentañ war dachenn Breizh eo Emil ar Mason ; e 1913 e sav Brug, ar gelaouenn gentañ graet evit ar bobl ha n'eo ket relijiel. Harpet eo ar Mason gant krouer kelaouenn ar C.G.T.U. ha penn-rener l'Humanité. "Bretons aimez vous, aimez votre pays, soyez à lui, il est à vous". Kalz pennadoù e brezhoneg a vez er Brug gant kenlabourerien ar Mason.

Gant krozadennoù kentañ ar brezel e chomo a-sav ar gelaouenn-mañ ha kalz re all ganti. Unan eus ar re nemeto o tont en-dro er-maez 'voe Dihunamb.

Souezhet e vezer o c'houzout pet lenner a zo bet da gelaouennoù 'zo. Ar gelaouenn gentañ Feiz ha Breiz a oa etre 12 ha 15.000 a dud o lenn anezhi betek ma chomas a-sav e 1884. E miz Genver 1906 e krog Loeiz Herriou hag Andreu Mellac da embann Dihunamb, e miz Eost eus ar memes bloaz e oa 3.000 koumanter.

N'eo ar pennad-mañ nemet un dampskeudenn eus an holl draoù a zesker a-dreuz lenn al levr-mañ. Klasket en deus Fañch Tremel komz ivez eus an dud o-unan, a vez lesket re alies a-gostez d'e soñj. Hep harpañ o deus tud 'zo labourer, La Borderie, tud dianav a-wechoù, Guillaume Le Coat, Pastor an Iliz Reformet, bet savet gantañ ur greizenn protestant e Tremel, hag evel-just labour tud e-giz Frañsez Vallée....

Bras eo bet niver ar voulerien vreizhat o kemer war o choug ur gelaouenn a oa alies mat diasur dazont stad he c'hef. Camille Mellinet (Naoned) e penn le lycée Armoricain, Marteville (Roazhon) e penn La Revue de Bretagne, ... Taldir ha Goaziou (Karaez) e penn ar Dobl.

Goude bezañ treuzet un amzer all gant al levr-mañ e soñjer en amzer a-vremañ. Kalz tud o deus savet kelaouennoù, goût a raent en a-raok 'vefe diaes ar stourm, lod 'zo aet d'an traoñ. Kelaouennoù all 'zo ganet neuze gant un nerzh nevez. Tud 'zo chomet a-sav digalonekaet, lod all leun a fiziañs o deus boucl'het un hent nevez. Ar vuhez. Poan, fiziañs, stourm, gwarizi, douetañs, diskred ha fiziañs adarre. Gant an holl gelaouennoù-mañ, mat ha fall mesket, chomet sac'het, aet war-raok, eo bet kaset war-raok ar stourm a gendalc'her bremañ gant hentenoù di-heñvel.

Degas a ra da soñj deomp al levr-mañ eus labour tud, 'zo dianav deomp alies, kollet ma'z eo bet o anv e puñs an amzer drement. Kavout a raio an hini en do c'hoant da lenn al levr-mañ, tro-ha-tro, nerzh, dizesper, tristidigezh, fiziañs, buhezioù tud ivez, bet renet o buhez gant ar stourm, evit ul lod bras anezho.

RIVAL

SKRID
DANEVELLOU-BARZHONEGOU
TROIDIGEZHIOU
RENER : GW. DENEZ
KOUMANANT EVIT 4 NIV.
40 LUR DA BER DENEZ
RI-PLDARE - 29100
DOUARNENEZ

SONEREZH

"DE DANANN ALL STARS"

A-raok na zeuas ar "V-Milezianed" da aloubiñ ar vro, bez e oa div bobl o chom en Iwerzhon : ar "FIRBOLG" hag ar "TUATHA DE DANANN" (pobl an Douez Dana) Gouiziek bras 'oa ar "FIRBOLG" war veur a zanvez. An "TUATHA DE DANANN", int, a oa gouiziek war bep tra. Aze 'oa an diforc'h. Kanned e voe ar "FIRBOLG" e emgann Southern Moytura (war harzoù kontelezh v-Mayo hag hini Galway) met roet 'voe ar C'honnaught dezho. Ar Formorian a zeuas neuze da zistruj an "THUATA DE DANANN", rak tud drouk e oant met ne zeuas ket ar maout ganto. LUGH (mab da v-Manann Mac Lir, Roue ar mor) haroz bras an DE DANANN a lazhas gant un taol kaer-kenañ roue ar "Formorian", "BALOR LAGAD DROUK".

Met kontet 'oa bet d'ar v-Milezianed gant Moizez (Miled pe v-Milesius 'oa roue dezho) o devoa da dizhout "enezenn o flanedenn" (= Inisfaill).

Ha setu int gant an hent (ar mor kentoc'h). Ha da zilestrañ en Iwerzhon, daoust d'ar taol gwall-amzer kaset davet o bigi gant an "DE DANANN" hag e lakaas nouspet bag da vont d'ar strad.

Kejañ a rejont neuze gant an "THUATA DE DANANN" e Taillte e kontelezh Meath. Ne oa ket farsus an emgav. Flastret an DE DANANN. Hervez tud 'zo la youl

vat !), divarvel' aet e voent neuze gant Manann, hag a alias dezho mont da repuñ dindan menezioù ken glas Bro-Iwerzhon, ha dibaoe o deus bevet eürus-tre eno. Un istor all a gont e vefent aet da repuñ er menezioù ha kleuzet o defe toulloù enno evit bevañ. Piv kredin ? Romanteloc'h eo istor Manann. Novezhioù 'zo (hervez tud 'zo) e tizouar-ont 'vit gwelout penaos 'mañ an traoù a-us hag evit ober farsadennoù a bep seurt d'ar re ziseblant ha lorc'hus a vale warno. War a seblant un tamm strobinieller e vefent, hag an taolioù farserezh a blij dreist dezho. Setu berr-ha-berr istor an "DE DANANN". (Brav neketa ?)

"Nevez deut" (evidomp) eo pedervet pladenn "DE DANANN" (ur strollad sonerezh an hini eo) : "DE DANANN ALL STARS" (Polygram Records), ha talvoudus eo e meur a geñver. Setu perak e alian deoc'h n'eo ket mont da repuñ dindan geot glas Breizh, met espern ur bilhedig 50 l bennak (a-raok paeañ ho tailhoù), ha prenañ ha selaou anezhi, ur werennad "Black Bushmills" en ho torn, azezet e korn an tan, an noz goude koan, o tas-krenañ gant ar from, an eürusted hag ar velkoni.

Abaoc'h pell dija eo bet diskouezet o ampartiz gant an "DE DANANN". O zeirvet pladenn "THE MIST COVERED MOUNTAIN" a oa bet troet dreist-holl davet kanaouennoù hengounel e gouezeleg kanet kaer-kenañ gant Tomas Toibin. Ar wech-mañ int aet da weladenniñ kanaouennoù ha sonerezh Iwerzhon - Stadoù-Unanet" ar bloavezhioù 1920. Ar wech kentañ eo,

war a gredan, e vefe bet adc'hoariet an tonioù a lakae Iwerzhoniz 1920 da fromif er Stadoù-Unanet. Kanet kaer int gant Maura O'Connell eus Ennis.

Mare trellek-mik ar "Charleston", ar "Black Botton", ar "Foxtrot" a glote gant hini ar sonerezh iwerzhonat amerik-an er Stadoù Unanet. John Mac Cormack a gane neuze kaerder ha douster un amzer drementet fromus (an amzer drementet a vez kaer bepred ... N'eo ket gwir P.J.H. ??) Ar vreudeur Flanagan a lakae an harluidi da zañsal evel gwechall-gozh e menezioù ar C'honnemara. Met e New-York an hini 'oa.

Gant Maura O'Connell 'vez kanet "THEN YOU'LL REMEMBER ME" eus Balfe, "BOHEMIAN GIRL" ha "MAGGIE" ur ganaouenn adkempennet hervez Mc Cormack, "WHEN YOU AND I WERE YOUNG, MAGGIE". "MY IRISH MOLLY-O" a c'hoarzh goap, war un ton tost-kenañ eus ur fox-trot, ouzh an istorioù karantez. "COME BACK AGAIN TO ME, MAVONREEN" a zo dres arouez an amzer-se, arouez "ar c'hanaouennoù karet gant hon tadoù".

Er bloavezhioù 1920 e teue c'hoari-erien ha kanourien a bep seurt da c'hronnañ er salioù-enrollañ. Sonerezh iwerzhonat-amerikan a veze goulnnet gant Iwerzhoniz savet melkoni o bro garet en o c'halon. Ar benveg sonerezh ar muiañ implijet a voe ar "melodeoñs" gant ur renkennad dek notenn. Ha brudetañ c'hoariet a voe John Kimmel lesanvet "The Irish Dutchman". Evit c'hoari "THE CUCKOO'S NEST" war ar bladenn, e

implij Jacky Daly un arkodeoñs graet a-ratozh-kaer gantañ e-unan.

Unan eus brasañ fiddlerien an amzer-se a oa Sligoman James Morrison. C'hoariet brav eo "THE TAILOR'S THIMBLE" gant Frankie Gavin. Kanañ 'ra ivez "I'M LEAVING TIPPERARY", ur ganaouenn zivroañ fromus met kanet war un ton mousc'hoar-zhus.

Evit diskouez o ampartiz ha war un dro pegen aes eo d'ar sonerezh hengoune! mont eus ur mare d'unan all, e vez c'hoariet ganto "HEY JUDE", kempennet en doare iwerzhonat.

Ur gerig c'hoazh diwar-benn ar golo. Mod 1920 eo. Ur bladenn da brenañ a drasur. Na zisoñjit ket ar bannig wiskey!

Herle DENEZ

Pladennoù an "DE DANANN" :

- 1 - 1975 "Polyador 2904 005 super" gant Dolores Koane, Frankie Gavin, Alec Finn, Charlie Piggot, Johnny "Ringo" Mc Donagh.
- 2 - 1976 "DECCA SKL.R.5287" gant Frankie Gavin, Johnny Moynihan, Charlie Piggot, Alec Finn, "Ringo" Mc Donagh.
- 3 - 1980 "The Mist Covered Mountain" Gael Linn CEF 087
- 4 - 1981 "De Danann All Stars" Ogham Records BLB 5006 gant Maura O'Connell Jackie Daly, Alec Finn, Frankie Gavin, "Ringo" Mc Donagh, Charlie Piggot.

LABOUSED

Ur c'houlz 'zo bet e veze lazhet kement labous-preizh o nijal en oabl. Laboused noazus 'oa anezho war a lavare an dud. An deiz a hiziv ez eo difennet groñs diskar anezho hervez al lezenn, ul lezenn ha ne vez ket taolet kalz pled outi e-gwirionez. Gwashoc'h eget ar chaseourien a zo avat : an tremp chimik a vez implijet gant ar gouerien ! Mag-adur al laboused-preizh a ya da get hag an diskoulm netañ a chom ganto a zo kuitaat ar vro. Al logotaer a weler c'hoazh aliesik en hor bro. Bep tro

barez a zo hogos heñvel panevet ez eo rousoc'h kein ar par ha gris e lost. N'eo ket gwall-ampart da chaseal al laboused all. Filiped gwan pe gloazet a bako met kentoc'h e klasko logod, amprevaned ha glazarded. Sevel a ra e neizh hogos forzh pelec'h e Breizh. Ur c'hoad stank a-walc'h, un tevenn a-serzh pe ur vengleuz dilezet a zereo outañ. Kavet ez eus bet e neizh e beg tour iliz-veur Naoned ! War-dro kreiz miz Ebrel, derou Mae e vo dozvet ar vioù kentañ. Pevar pe c'hwec'h vi gwenn gant brizhennoù rous ha ruz warno a gaver en neizh. Da ziwall a vo ouzh ar breizherien all, brinf, maoued hag a zeuio da

al logotaer



ma'z an gant gourhent Brest-Kemper em eus tro da welet anezhañ o c'hournijal a-us d'an hent. E-giz ma vije seizet e chom en aer, hogos difiñv. Pell e chomo da sellet pizh ouzh an douar ha trumm e splujo davet ar preizh. Alies e vezo ul logodenn-vors bet flastret gant ur c'harr bennak. N'eo ket gwall-vras, a vent eo gant an durzhunell pe ar vran louet, un tamm mistroc'h e gorf avat hag hiroc'h e zivaskell hag e lost. Ar par hag ar

daññ an neizh. Peurvuiañ ne chomo nemet daou pe dri yaouank hag a zenko chaseal buan a-walc'h. Darn eus al logotaerien a chomo er vro ma n'eo ket re start ar goañv, ar re all, ar re yaouank peurvuiañ a yelo kuit d'ar broioù pell. (Mer Baltek pe Afrika ar Su). TUDU

Anvioù all al logotaer: ar sparfall ocan (Lac), ar sparfall (Skirguag) a likitan (karnel), ar fal'hun.

FR3

KIZAILHEREZH F.R.3

N'eus ket pell 'zo e oa daet ur skipailh a F.R. 3 Bro-C'hall da Vreizh-Izel evit sevel ur film diàr benn **DASTUM**. El ma ouit e labour **DASTUM** astrolladigoù strevet un tammig e pep lec'h dre ar vro, unan anehe faote dehe filmiñ hag int neuze ha dont da Gervignag da welet "Dastumerion ar C'hreisteiz" da gontañ pemp ha pevar diàr benn o labour hag ar c'hanennoù a sav unan anehe.

Biskoazh bravoc'h emañ bet an traoù etre doareatellat ha laret kaer hag an dastumerion, evit kloziñ get an abadenn, oa deli dehe digas unan, pezh o deus graet a galon vat, unan savet dehe. En em glevet e oant, istitlet vehe bet ar ganenn ha rac'h.

Eizhteiz àrlerc'h e pellgomzer a berzh F.R. 3 : goude bout lennet an droidigezh anehei ne oa ket tu ken da skigniñ ar ganenn, "diskaret vehomp", eme renourion an abadenn ■ "grataat a raomp deoc'h ur seurt he skigniñ ur wezh bennak".

Hama ! Else emañ an traoù e bed an Tele, kanennoù 'zo a vez diaes da istitliñ. Savet oa bet honnezh da gefiver marv tri galvad yaouank e Noumea, daou vle 'zo bremañ. Setu ar c'homzoù anehei :

"Selaouit tud yaouank ha c'hwil re gozh ivez, C'hwil ' glevay ur ganenn a-enep d'an arme,

E-barzh an arme c'hall eh eus kapitened

zo ken kriz a galon òl m'emañ berr a spered

Kriz eo o c'halonou, goulle kaer o fennou,
ruz kel eo o daouarn a wad o zorfetoù,

N'en deus ket c'hoazh gwezo ha kostez Noumea,
o doa lazhet tri den, éite 'ket kalz a dra,

Dindan an heol loskus, lârer oant bet kaset,
'oant ket 'met ugent vle, meskete Bre-toned,

Dirak ar varnerion kapitened kaset
na da c'hwec'h miz hepken emañ bet kondaonet,

Tri miz get ar sursi, n'en deo ket kalz a dra,
n'o deus ket bet muioc'h, mechal gaoz da betra,

An dra se 'ziskoa splann emañ c'hoazh gwell lazhiñ,
evit lakaat da sailh bernioù kaoc'h,
bernioù mein".

Mechal peseurt si o deus kavet d'ar ganenn-se na lar neoazh nemet ar wirionez.


Kalz ne vern, kanet eo bet deiz kan ar bobl (devezh dibab e Bubri) dirak ur mil bennak a dud hag a ziàr ar leurenn e welemp tud e tiskan, kozh ha yaouank. Soñj mat m'eus ag ur vrichad re gozh, en o dozn testenn ar ganenn (kement ha gober hor boa tennet un nebeudad da roiñ d'an dud), a ziskane deomp a galon.

F.R. 3 Breizh a oa er sal ivez 6 fil-
miñ an devezh dibab, kerzhit da ouiet
petra o deus dibabet, int ?

* an abadenn-se, "Ouvert le dimanche",
a vo skignet d'ar sul d'enderv adal
miz Ebrel ar FR3, met doc'h ma welomp
ne vo ket digoret he dorioù da bep tra.

D. SN DOUJET

GERIOU-KROAZ




A-led

- I - Meur a hini er mor pa vez o skediñ
- II - An hini beg tougn a zo
- III - Terrif ar grogen
- IV - Dornet-mat
- V - Kalz a zo e-pad ar vakansoù
- VI - Eus kanol - Pennoù reun
- VII - Poan
- VIII - Nenn dibennet - N'eo ket brabañser

A-Zerc'h

- 1 - houlen
- 2 - Piñson
- 3 - Ret eo he c'haout evit bezañ peursur
- 4 - Reoù blev da skouer
- 5 - Eus kiig - Salud berr kozh
- 6 - Netra a-dreuz
- 7 - Raganv-gour - Ger-mell



AL LIAMM

LEVRIOU DIWEZHAN DEUT ER-MAEZ

KENAN KONGAR BARZMONEGOU

war baper boutin : 28 lur

war baper kaer : 48 lur

JAKEZ KONAN UR MARC'HADOUR

A VONTROULEZ

war baper boutin : 25 lur + mizoù

war baper kaer : 32 lur + mizoù

REUN AR C'HALAN LEVR AR BEANEDENN

war baper boutin : 29 lur + mizoù

war baper kaer : 36 lur + mizoù

MAODEZ GLANDOUR IZATA

war baper boutin : 34 lur + mizoù

war baper kaer : 40 lur + mizoù

Kastit ho chekem war-eeun da :

J. QUELLE

47, str. Notre-Dame

52200 GWENGAMP

CCP. 1136 62 ROAZHON

KEAV

44 straed Jean Rameau
29000 KEMPER



KEAV - 44, straed Jean Rameau
29000 KEMPER

KEAV, ezel eus ar' gengevredigezh KUZUL AR BREZHONEG, a gemenn e vo dalc'het staj 1982 e SKAER, e skol Sant Alan, fin miz Gouere.

Kregiñ a ray d'ar MERC'HER d'an noz 21 evit echuiñ d'ar SADORN 31 a viz GOUERE da greisteiz.

Renet eo ar staj e brezhoneg penn-da-benn. Digor eo d'an holl re o deus kroget dija da studiañ ar yezh, evit ma c'hellfent en em zibab hep tremen dre ar galleg.

Setu amañ da heul un nebeut resisadurioù diwar-benn ar staj :

AL LABOUR :

- Diouzh ar mintin : Kentelioù hervez al live.
Studi war ar yezh adalek oberennoù skrivagnerien, kaozeadennoù diwar-benn danvezioù liesseurt, enrolladennoù.

- En endervezh : hervez c'hoant ar berzhidi hag an amzer : kentelioù, kaozeadennoù, stalioù labour.

- Goude koan : abadennoù a bep seurt.
Pep hini a c'hell degas binvioù seniñ, luc'hvannoù pe filmoù da ziskouez eus un danvez a blij dezhañ.

PRIZ AR STAJ = 600 lur. Goulennet e vez ouzh ar berzhidi kas en arak an hanter eus priz o c'hampad. Kas an arc'hant da

KAMP ETRKELTIEK AR VREZHONEGERIEN
K.R.P. 2.869 82 J ROAZHON

dre chekenn-bost pe chekenn-vank.

Degas ur sac'h kousket, pe palennoù ha liñselioù.

EURIQU-TREN evit mont : PARIS - KEMPER
diskenn e ROSPORDEN (war-dro 19 eur)

An deiz kentañ (merc'her 21/7) e vo tud o c'hortoz ar berzhidi dirak ti-gar ROSPORDEN, evit o c'has da SKAER (10 km)
Koan a vo servijet da 20 eur en deiz-se.



SONEREZH

KEJADEG ETREROADEL AL LUDERIEN HAG
AR VISTRI-SONERIEN. St CHARTIER 36

E KASTELL SAINT-CHARTIER (36) ETRE
AN 10 HAG AR 14 A VIZ GOUERE 1982.

D'AR SADORN 10

15 eur : diskouezadeg gant al lude-
rien.
21 eur 30 : sonadeg gant Mélusine,
Marieke en Bart ha Les Musiciens
Routiniers.

D'AR SUL 11

10 eur : kenstrivadeg bielloù ha
biniawoù.
15 eur : amicale des Vielleux-Cor-
nemuseux, Tibor Klobicek, la sabo-
tée sancerroise.
21 eur 30 : sonadeg gant Odhecaton,
Ken Campbell ha Kris Miller, Les
Plaisirs Champêtres.

D'AL LUN 12

Abadenn gant al luderien hepken.

D'AR MEURZH 13

15 eur 30 : L'Père Uzébe, Donogle-
zer. Leurenn digor d'ar vuzisianed.
21 eur 30 : sonadeg gant Valentin
Clastrier, Yvan Lantos, An Triskell
D'AR MERC'HER 14

15 eur 30 : strollad Notre Berry hag
ur strollad deus Bro-Yougoslavia.

PRIZIOU : ETRE 100 lur (evit ar pemp
devezh) ha 25 lur evit un abadenn.

TITOUROU : digant Silvi Renard, 33
rue de L'Ecole Normale, 45000 OR-
LEANS pe Michèle FROMENTEAU, 60,
AV. Briand, 36000 LA CHATRE.

GOUEL AR BREZHONEG

D'AR GWENER 28:

Diouzh ar beure: "c'hoari las" gant
ar Strollad Touseg Nij e marc'had
Gwengamp.

Da 9eur noz: abadenn sonerezh en
Iliz-Rouanez Gwengamp gant "Farsus
Tregorium Consort" (ur pevarfleut);
bombard-piano gant H. Toupet ha
D. Feon; Yann Fanch Kemener (Priz
C. Gros 1982); Anna Auffret.
Da 9eur noz ivez: un abadenn sone-
rezh ha kan an ostaleri "Ar Waskell"
(3 c'hilometr eus Gwengamp war hent
Boulvriag) gant Mona Jacouen, Gildas
Beauvir, Vefa Gwengamp, Mirbeau...
hag an holl re a blij dezho.

D'AR SADORN 29:

Diouzh ar beure dibunadeg e kêr
Gwengamp gant Strollad ar Vro Bagan.
Da 2eur g.m.: Gwerzhadeg-sinadeg gant
an holl skrivagnerien ha kanerien vre-
zhonek e Kreizenn Sevenadurel Roparz
Hemon, plasenn Verdun e Gwengamp (be-
tek 6eur).
Da 3eur e krogo Festival Gouel ar
Brezhoneg e sal Gergozh e Gwengamp
gant: Farsus Tregorium Consort, Ali
Grogan (eus Bro Gembre), Youenn Gwer-
nig, Gwalarn, Strollad ar Vro Bagan
(a c'hoario "Spontus Circus"), Alan
Stivell hag e sonerien. Fest Noz da
echuiñ.

D'AR SUL 30:

Da 10eur 1/2: diviz e brezhoneg diwar-
benn al labour-douar e Kastell ar
Roc'h Ugu.
Da 1eur 1/2: semi-marathon etre Gwen-
gamp ha Ploezal.
Da 2eur g.m.: war dachenn Bloezal
(e-tal ar Roc'h Ugu) Match Rugby etre
Skipailh Bro Dreger ha Skipailh ar Menez.
Da 3eur e krogo ar festival adarre e
Kastell ar Roc'h Ugu gant: An Touseg Nij,
Stlabez (bet Storlok), Padrig Ewen, Ar
Eleizi Ruz, Glenmor, Kristen Nagues,
I Muvrini (eus Korsika). Da echuiñ: ur
Fest Noz gant sonerien ha kanerien eus
Breizh a bezh, ha Strollad ar Bleizi Ruz.

